

BACCALAURÉAT GÉNÉRAL

ÉPREUVE D'ENSEIGNEMENT DE SPÉCIALITÉ

SESSION 2023

LANGUES, LITTÉRATURES ET CULTURES ÉTRANGÈRES ET RÉGIONALES

BRETON

Mardi 21 mars 2023

Durée de l'épreuve : **3 heures 30**

*L'usage du dictionnaire unilingue non encyclopédique est autorisé.
La calculatrice n'est pas autorisée.*

Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.
Ce sujet comporte 9 pages numérotées de 1/9 à 9/9.

**Le candidat traite au choix le sujet 1 ou le sujet 2.
Il précisera sur la copie le numéro du sujet choisi.**

Répartition des points

Synthèse	16 points
Traduction ou transposition	4 points

SUJET 1

Le sujet porte sur la thématique « Circulation des personnes, des langues, des cultures et des idées »

Axe d'étude : « Pèlerins, itinérants et promeneurs »

Partie 1 : synthèse du dossier (16 pts)

Prenez connaissance des documents du dossier et traitez le sujet suivant en breton :

Savit ur pennad-skrid (war-dro 500 ger) diwar-benn ar foeterien-hent evel m'int bet taolennet en teir diell. Gallout a reoc'h toullañ meur a hent ha klask gouzout :

- a) petra a vroud ar foeterien-hent da vont gant o hent.
- b) peseurt gounid a dennont eus o c'hantreadennoù.
- c) peseurt skeudenn anezho a zeu war-wel.

Partie 2 : traduisez le passage suivant du document A en français. (4 pts)

« Neuze e krog Yann gant e redadeg. Un devezh e pep lec'h, ur pred e pep ti. Eus pelec'h e teu ? Da belec'h e ya ? Den ne oar mat. Gwelet a reer anezhañ o tegouezhout er c'hêrioù, da vare ar foenn, pe an dornadeg, pe an avaloù-douar. N'eus ki ebet da harzhal outañ, den ebet da c'houlenn netra digantañ. Kregiñ a ra en ur forc'h, ur varr, e penn ur marc'h. Ul labourer kaer eo. Nemet a-wechoù, e-kreiz an dalc'h, e sav e benn d'al laez o selaou n'ouzer ket pe vouezh o c'hervel. » (l. 35-40)

Diell A

Yann e-Votoù-Skañv

Ma oa ken paour tud ar Gosker-Vihan, paour da lazhañ, ne oa netra kaoz nemet an tad. Un tad hag a oa outañ ar gwellañ den en deus tennet biskoazh e alan war an tamm douar-mañ, nemet seizh avel ar bed a voude en e benn. Hag an tad a sente atav ouzh an avelioù-se, o c'hervel anezhañ da vont ganto da c'haloupat bro. Ne c'houzañve ket an den paour bezañ staget ouzh e di, e-giz ur vuoc'h ouzh ur peul war-bouez ar fun. Labourer-douar ha boutaouer e oa mestrig ar Gosker-Vihan, a zo nemet un tiig-soul divalav, ul liorzbig endro dezhañ ken strizh hag ul lasenn koef-pemdez. [...]

O kempenn al liorzbig gwellañ ma c'helle, e tenne dioutañ, bep bloaz, ur vriad pour, dek lur karotez ha daou sac'had avaloù-douar. Hogen, nav a vugale en doa, setu e oa ret dezhañ mont da zevezhiañ evit kaout boued da neizhad tud ar Gosker-Vihan. Met, ur wech ar bloaz, e kleve en e benn heklever ur galv hag e kerzhe kuit war an hentoù, ur sac'h war e gein, o kanañ ken flour hag un eostig, divotoù krenn, e galon o tridal gant al levenez. Evit-se, an dud a vev sul-gouel-pemdez etre park ha ti o doa graet outañ, hanter c'hoap, hanter doujañs, Yann e-Votoù-Skañv.

E-pad ar goañv, c'hoazh, Yann a chome en-dro d'an ti mat a-walc'h hag a boanie start o tevezhiañ. N'eo ket brav ober kof moan d'ar goañv hag an den a gare kalz e wreg hag e vugale. Evito e stourme kalonek er parkeier dindan ar gwall-amzer. [...]

Hag ar goañv a varve gant an Ebrel. Bleunioù an Nevez-Amzer a skoulme er gwez, ar geot druz a grene war an trestoù dindan lazig an avel c'hwezh vat, an alc'hweder a save uhel ha plomm e donder an neñv flamm. Divjod ar vugale a ruzie dindan lamm ar gwad fresk. A-barzh pell e vefe gwelet an dud o tebriñ ar yod-kerc'h war dreuzoù an tier. Yann a verve c'hoant en e greiz. Mont kuit, mont pell, mont kuit, mont pell, mont ac'hann, mont ac'hann da glask petra 'ta ? N'eus forzh. Sellet a rae ouzh ar c'houmoul gwenn o tremen dirazañ hag o treuziñ war an dremmwel : « Deus ganeomp, den paour ! Perak chom aze ? Perak mervel hep gwelet biken kaerder ar broioù dianav ! » Ha Yann a huanade : « A, mont kuit ! »

Ar wreg hag ar vugale a anaveze mat kleñved an tad. Met petra ober ? Lezel anezhañ da vont ha chom bev gwellañ ma c'hellent betek e zistro. E-pad an hañv e vez kavet boued a-walc'h war ar maezioù. Hag ur mintinvezh, pa zihune ar vugale, oc'h astenn gouzoug er-maez eus o gweleoù-kloz, ne welent ken divskoaz an tad e-tal an daol, war-du ar prenestr. [...]

Setu ar botaouer burzhudus war-lerc'h e c'hoant. Ar bed-holl a zo dezhañ. E zaoulagad n'int ket bras a-walc'h. Lamm e galon a dregern dre e izili penn-da-benn. Kan al laboused a denn anezhañ pelloc'h.

Neuze e krog Yann gant e redadeg. Un devezh e pep lec'h, ur pred e pep ti. Eus pelec'h e teu ? Da belec'h e ya ? Den ne oar mat. Gwelet a reer anezhañ o tegouezhout er c'hêrioù, da vare ar foenn, pe an dornadeg, pe an avaloù-douar. N'eus ki ebet da harzhal outañ, den ebet da c'houlenn netra digantañ. Kregiñ a ra en ur forc'h, ur varr¹, e penn ur marc'h. Ul labourer kaer eo. Nemet a-wechoù, e-kreiz an dalc'h, e sav e benn d'al laez o selaou n'ouzer ket pe vouezh o c'hervel. Hag alies, setu ar forc'h pe ar varr d'an traoñ, setu ar marc'h digaset d'ar gêr d'e vestr hag an den kuit. Lezel a reer anezhañ da vont.

Diwar Per-Jakez Helias (1914-1995), « Yann e-Votoù-Skañv », *Mojennoù Breizh*, Emgleo Breiz, 2001 [1962]

¹ Ur varr : un trañch

Diell B



Tudu, *Fri Korloko*, Al Liamm, 1975

Diell C

Kantreezech

An noz zo diskennet hep trouz
Ma-unan on 'hont war ma hent

5 Ar goulou e-barzh an tier a zo lazhet
Hag an norioù zo prenet
Kousket eo an dud fur hag an dud renket

Ma-unan on 'hont war ma hent

Dindan ma zreid a zo mein
Dirak ma daoulagad emañ an neñv

10 Pelec'h emañ ar steredenn
A raio din muioc'h a sklêrijenn

15 Steredennoù e-barzh an neñv
Zo e-giz bugale e-barzh an ti
Morse ne chomont en o flas
Hag o daoulagad zo 'tañsal
Endro d'an ti
Pe endro d'an neñv

Ma-unan on 'hont war ma hent

Dindan ma zreid a zo mein
Dirak ma daoulagad emañ an neñv

20 Skañv eo ma c'halon
Didrouz eo ma zreid

Koulskoude marteze
Unan bennak am eus direnket
Ar marc'h kousket e-barzh ar park
25 Pe ar pichon kousket e-barzh ar wezenn
Piv en eus bet aon

Ouzh den ebet n'emaon 'klask droug
Loen ebet n'en deus aon dirazon
Ne don ket spontus nemet
30 evit an dud re fur

Ma-unan on 'hont war ma hent

Mein a zo dindan ma zreid
Karantez a zo e-barzh ma c'halon
Peoc'h a zo e-barzh ma spered
35 Sklêrijenn a zo e-barzh ma daoulagad

Daniel Trellu (1919-1998), *Barzhonegoù*, Brud, 1976

SUJET 2

Le sujet porte sur la thématique « Pouvoirs et contre-pouvoirs »

Axe d'étude : « Les désobéissances sociales, une tradition ? »

Partie 1 : synthèse du dossier (16pts)

Prenez connaissance des documents du dossier et traitez le sujet suivant en breton :

Savit ur pennad-skrid (war-dro 500 ger) diwar an dielloù evit displegañ penaos e oa bet degemeret an adlodennañ e Breizh. Gallout a reoc'h toullañ meur a hent ha klask gouzout :

- a) petra oa an adlodennañ er bloavezhioù 1960 ha 1970 ;
- b) petra eo bet an efedoù anezhañ war an natur, al labour-douar hag an dud ;
- c) perak ha penaos e oa bet stourmet a-enep an adlodennañ.

Partie 2 : traduisez le passage suivant du document C en français. (4pts)

« A-benn ar fin e oa diskennet diwar ar c'hleuz, badaouet c'hoazh gant an arvest euzhus-se, hag eñ da vont ha da zont eus an eil penn eus e liorz d'egile, evel un den kollet e benn gantañ. En em santout a rae breset, gwasket e galon, gwallet e gorf, evel pa vije bet, eñ e-unan, taget gant dent an heskennerez. Goude ar boan-spered e save ar gounnar ennañ : piv en doa kredet ober se, hep goulenn tra digantañ ? Piv a oa sot ha fallakr a-walc'h evit mont da zistruj gwez ken kaer ha ken talvoudus, evit ur gounid ken dister ? » (l. 11-17)

Diell A

Terouer Breizh

Emaoc'h e-barzh ar gevredigezh anvet Le Terroir breton (Terouer Breizh). Petra eo ? Perak eo bet savet ?

5 Loeiz Ropars : E 1969 e oa bet savet Terouer Breizh gant ar soñj-mañ : ret e oa difenn an Natur e Breizh, ha kement tra a ra he c'haerder hag he zalvoudegezh d'hon bro. Ret e oa
10 klask an tu d'en em zifenn diouzh an dismantrou a welemp oc'h ober o reuz dre ar vro, dreist-holl da-heul an adlodennañ. Kerkent hag ar bloaz 1966 avat, hon doa klasket hen ober gant sikour Kambr Labour-douar departamant Penn-ar-bed, da heul galvadenn va mignon Pichon, hag a oa ul labourer-douar a gomze en anv ur c'hant bennak eus e geneiled peizanted. Ha komprenet hon doa ne vefe fin ebet da zistruj ar maezioù keit ha ma ne vefe ket cheñchet lezenn an adlodennañ e Breizh da vihanañ.

Petra hoc'h eus graet neuze ?

Ur strolladig tud ampart war al labour-douar ha skiantoù an Natur zo bet savet evit studiañ un danvez-lezenn nevez [...] ha gwelet hon eus e veze adlodennet e Breizh evel pa vije bet ar Brie pe ar Beauce, da lavarout eo hep derc'hel kont eus ar vro.

15 *Petra a laka an traoù disheñvel e Breizh ?*

Ur bern traoù a zo : n'eo ket kompez an douar, kalz avel a zo peogwir emamp tost eus ar mor, n'eo ket don an douar da labourat, dour a zo un tamm pep lec'h ha setu perak ez eus kement a gêriadenoù. Ha setu ma teu amañ teknokrated eus lec'h all, hag a sav raktresoù en o burevioù hep bezañ chalet gant ar vro na gant an dud o vevañ enni.

20 *Peseurt efed en deus an adlodennañ war an douaroù ?*

25 Setu amañ ar pezh a lavar hon mignoned labourerien-douar : « Un efed mat en deus an adlodennañ evit lod eus an dud, ar re a zo bet roet dezho lodenoù kompez, tost eus ar gêr, bodet mat, aes da labourat gant douar mat enno ; ha gant reoù all n'ez a alies nemet restajoù ! » A-hend-all ez eus bet distrujet ur bern kleuzioù dre ar vro : 350 km e pep parrez, dre vras. Da heul an distruj ez eus deuet efedoù aes da gompren : kreñvoc'h e sko an avel ; an dour oc'h en em silañ tamm-ha-tamm en douar, a ya diouzhtu d'ar gwazhioù dre ma ne vez ket harzet ken gant ar c'hleuzioù. Setu e kresk en un taol an dour er stêrioù hag e vez glav e-pad pell – evel e miz C'hwevrer diwezhañ pa'z eo bet beuzet parkeier ha kêrioù evel Montroulez ha Kemper, da skouer. Da-heul an dour ez a kuit ivez tamm ha
30 tamm an douar mat. E Kemper ez eus bet merzet kement-mañ : gwechall pa veze arnev, e chome an dour lous er stêr Oded (Stangalla) e-pad un devezh, ha bremañ e chom lous gant ar pri e-pad eizh devezh.

Diwar *Evid ar Brezhoneg*, niv. 26, 13/12/1974, p. 2-4

Diell B

En nevez-hañv

En nevez-hañv en hor bro-ni, na pe ur vravite
Pa deo al lannoù alaouret get bokedoù melen

Du-hont er flagennoù didrouz pa vez kaer an amzer
E vez klevet ur vouezh ken dous, ur vouezh dous ha tener

5 Lârit din-me eostig kaner pa ganit er c'hoedoù
Ho kalon-c'hwi 'vez bepred gae, n'ho peus ket c'hwi daeroù

Ni holl bugale Breizh-Izel, hor c'halon zo gwasket
'Welet bemdez a bep tu deomp ar maezioù gwallgaset

10 Tuchant ne vo ket mui gwelet ar bleuñv 'barzh er banal
Nag ar pousinedoù er c'hoed 'bep tu deomp é nijal

Na taolet e vez razh ar gwez, distrujet an neizhioù
Tuchant ne vo ket mui klevet o c'hanoù er c'hoedoù

Diskaret e vez ar c'hleuzioù evit brasaat an douar
D'an hañv ni ne gavimp ket mui, o nann, na bodoù klouar

Pozioù gant ar strollad Dir ha Tan

Tennet eus ar bladenn *Dir ha Tan*, Vol. 2, 1974

Diell C

Pa oa en em gavet Stefan er gêr d'an abardaez-se e oa chomet mantret : e-lec'h ma oa c'hoazh gwez uhel ha yac'h en o sav diouzh ar mintin ne chome netra war ar c'hleuz uhel a zispartie e dachenn diouzh ar park e-kichen. Aet kuit e oa ar sedrenn veurdezus, ar wezenn ken brav a c'houdore e liorzh diouzh avel griz ar menez, ar wezenn en doa kement a blijadur o sellet outi bep mintin a-raok mont d'e labour ha pa deue en-dro d'ar gêr d'an abardaez. Seizet e oa chomet Stefan e-pad ur reuziad mat a-raok pignat war ar c'hleuz ha sellet ouzh ar wezenn vras en he led war ar geot, evel ur c'horf marv, brennheskenn en-dro dezhi. Pelloc'h e oa astennet tri c'horf marv all, dervennoù anezhe, a-boan berroc'h evit ar sedrenn... Pell e oa chomet Stefan en e sav eno, sonn evel ur peul, diseblant ouzh avel yen miz Du.

A-benn ar fin e oa diskennet diwar ar c'hleuz, badaouet c'hoazh gant an arvest euzhus-se, hag eñ da vont ha da zont eus an eil penn eus e liorzh d'egile, evel un den kollet e benn gantañ. En em santout a rae breset, gwasket e galon, gwallet e gorf, evel pa vije bet, eñ e-unan, taget gant dent an heskennerez. Goude ar boan-spered e save ar gounnar ennañ : piv en doa kredet ober se, hep goulenn tra digantañ ? Piv a oa sot ha fallakr a-walc'h evit mont da zistruj gwez ken kaer ha ken talvoudus, evit ur gounid ken dister ? Ha piv oa perc'henn an dachenn-se, harp ouzh e hini ?

Kroashent-tro, Kristian Braz, Al Liamm, 2020

Diell D



A-enep d'an adlodennañ, Trebrivan, 1972

« Résistances et révoltes dans l'histoire de Bretagne », Agence Bretagne Presse, 12/09/2017